

MINIBRIAK WAR ZAO.

+:+:+:+

War ton:Ar Biniou

Diouz beg tourell koatliou  
Ar "C'horn-Boud" en deus sonet,  
Dreist da Liskwis, da dregazou,  
E zôn aman'zo deuet  
-Daoust petra neve zo er vro?  
-Ne peus ket klevet ar c'helo?  
Hepdale, en Boulvriag,  
Vo gouel ar "MINIBRIAG".

Diskan

WAR ZAO, WAR ZAO, Minibriak...  
Bro en Duk "Drok" neo ket c'hoaz maro  
Ha hepdale en Boulvrag,  
He nerz, he c'haerder e tisplego.

II

Eur gouel' vel n'eus ket e'hoaz gwellet,  
Eur gwel keltiek a vo;  
Ar Minioriak unanet  
Dirag an holl a lâro:  
"Miret hon eus yes hon zadou,  
O gizioù, o gwiskamanchou!  
Ha bepred vevo'n hon c'hreiz  
Karante' vit hon bro Breiz".

Kerien; I4 Mezeven

Plac'hig Kerne

III  
Tud a bep tu a ziredo  
Diouz Treger ha Kerne  
Diouz Leon, diouz Goelo,  
A-dreuz traouienn ha mène,  
Vit gwellet hon yaouankizou,  
O tougen hon banniellou  
Displeget' barz an avel,  
Merk enor hon Breiz-Izel.

IV

Pep hini' c'hello, hep damant,  
Bevan eun de dizourisi,  
'Vit an holl vo diduamant,  
C'hoari-gaer, dans, kaniri...  
C'hoariellou' vo da 'wersan;  
Da zibri e vo ha d'evan,  
Laez ebarz ar skudellou,  
Jistr melen er chopinou.

V

Klevet am eus bet javaret,  
Ha me gred, vat, ac'h eo gwir,  
An den pa 'n'eus evurusted,  
Ne gavket an amzer hir ....  
Mar fell da' c'h kavet berr-amzer  
Dudi, plijadur, c'hoari-gaer,  
Disedet da Voulvriag,  
Da ouel ar Minibriak.

BRO GOZ MA ZADOU

NI Breizis a galon, karomp hon gwir vro,  
Brudet eo an Arvor dre ar bed t'ro dro  
Dispont kreiz ar brezel, hon zadou ken mad  
A skuillaz eviti o gwad.

II

Breiz, douar ar zent, koz, douar ar Varzed:  
N'eus-bro all a garan kemend' barz ar bed.  
Pep menez pep traouien d'am c'halon zo kaer  
Ennë kousk meur a Vreizad t'êr.

III

Ar Vretoned a zo tud kalet a krenv;  
N'euz pobl ken kalonég a zindan an nenv.  
Gwerz trist, sôn dudius a ziwant eno.  
O, Pegen kaer ec'h out, ma Bro.

IV

Mar-d'eo bet trec'het Breiz er brezelliñ braz  
He iez a zo bepred ken beo ha biskoaz.  
He c'halon birvidik a lamm c'hoas n'he c'hreiz  
Dihunet out brema ma Breiz.

DISKAN

O Breiz ma bro, me gar ma bro  
Tra ma vo m'êr vel mur' n'he zro  
Ra vezo dig'abestr ma Bro.